

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

PELL 1

Pell

Un anv-gwan peotramant ur rakverb eo hag a vez kavet dindan ar memes stumm e kerneveg hag e kembraeg

« Pell ac'hane »

« Ar saout n'int ket sot, pell ac'hane »

« Pell muioc'h evit », kalz muioc'h evit

Evit un dachenn

« N'eo ket pell », « N'eo ket gwall bell »

« Sant-Nigouden n'eo ket gwall bell deus Purid »

« Sant-Nigouden zo 7 km deus partout »,
(Lokarn, Kergrist-Moeloù, Tremargad,
Purid-Kintin, Mael-Pestivien...)

« Pell emañ Yann deus e gazeg »,
n'omp ket prest da gavout un diskoulm

« Karantez tost a zo laosk,
karantez pell a zo gwell »,
kontrefed ar galleg
« loin des yeux, loin du cœur » ...

« Pelloc'h evit »

« Ar pellañ »

Pellaat,
bezañ, mont pelloc'h

Ar pellder pe ar pelloù
ar pezh a zo pell

« Mont da bell »,
mont pell deus gêr

« Aet eo da bellvro »,
aet eo d'ar broioù pell

« Pellik »

« Pellik-mat ac'hane »,
n'eo ket gwall bell met n'eo
ket gwall dost kennebeut

Da vont pelloc'h

Kit da selaou
ar ganaouenn
Ar vatezh vihan
gant
Anne Auffret
ha Florian Baron



<http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/>
skeudenn krouet gant Malo Ar Menn

COPFINANÇÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec les Fonds européens
de développement régional

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ Radio Kreiz Breizh

PELL 2

Pellgar, tud deus ar familh met n'int ket deus ar familh dost

« Hennezh zo pellgar dimp »

Pellgerent

Tostkar, tud deus ar familh dost

Hag evit an amzer

« Pell zo », « Pell zo zo 'baoe »

« N'eus ket gwall bell zo »

« 'Vanka ket chom re bell »




http://www.resau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennaou_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

« Ne vin ket pell »

« Ne chomin ket pell »

« 'Vo ket pell e vo gwelet »,
a-benn nebeut e vo gwelet

« A-raok pell », a-benn nebeut



Pellachoù,
traoù a vez taolet,
lastez, lostachoù

Pellgomz

Pellskridenn

Pellwelerez

Pellemvod


Pellgargañ

Pell-labourat

Pellbrenañ

« Gortoz pell,
gortoz gwell »

« Erru eo pell ganti »,
n'eo ket gwall sklaer
e vennozhioù ken,
erru eo kozh bremañ



Cofinancé par
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne

Avec les Fonds européens
de développement régional